

Dihustell al Loeroù Ruz

Peder c'hanerez ar strollad "Loeroù Ruz", Azenor, Bleunienn, Lena, Maiwenn, a gan e festoù-nnoz, er Mor-Bihan peurvuañ. Dre ma oa re ziaes kavout loeroù ha botoù ruz da bep hini anezho o deus kavet gwelloc'h lakaat botoù ha loeroù ruz, glas, melen ha gwer. Met n'eus ken nemet ur re loeroù hag ur re votoù eus pep liv! Marteze e c'hallit lavaret penaos int gwisket?

À vous de retrouver, au vu des indices proposés, comment sont habillées les quatre chanteuses du groupe « Loeroù Ruz » sur scène, sachant qu'elles disposent d'une paire de chaussures rouges, bleues, vertes et jaunes et d'une paire de chaussettes rouges, bleues, vertes et jaunes...

1. Unan anezho he deus lakaet loeroù ruz gant he botoù glas.
2. Loeroù melen zo gant Bleunienn, met n'eus ket botoù melen ganti.
3. An hini he deus lakaet botoù gwer n'he deus ket gwisket loeroù glas.
4. N'eus na botoù ruz na loeroù ruz gant Maiwenn.
5. Botoù Lena a zo a-liv gant loeroù Azenor.
6. An hini he deus gwisket loeroù glas he deus lakaet botoù ruz.



© Pewara Nicropithak

Daou ziskoulm a c'hell bezañ :

	Azenor		Bleunienn		Lena		Maiwenn	
	botoù	loeroù	botoù	loeroù	botoù	loeroù	botoù	loeroù
glas	✓	✗	✗	✗	✗	✓	✗	✗
gwer	✗	✗	✓	✗	✗	✗	✗	✓
melen	✗	✗	✗	✓	✗	✗	✓	✗
ruz	✗	✓	✗	✗	✓	✗	✗	✗

	Azenor		Bleunienn		Lena		Maiwenn	
	botoù	loeroù	botoù	loeroù	botoù	loeroù	botoù	loeroù
glas	✗	✓	✗	✗	✓	✗	✗	✗
gwer	✗	✗	✓	✗	✗	✗	✗	✓
melen	✗	✗	✗	✓	✗	✗	✓	✗
ruz	✓	✗	✗	✗	✗	✓	✗	✗

Ar frazenn guzh La phrase cachée

Ha lennet mat ho peus ar pennad diwar-benn an troioù-lavar *Les pesked capitaux*? Anv zo enne eus pesked... Unan anezhe koulskoude ne vo ket pesketaet er bajenn 19, er gael amañ dindan ne lavaran ket! Deoc'h da adlakaat pep lizherenn en he linenn, hep cheñch kolonenn koulskoude. Aesoc'h e vo deoc'h pa ouezit e kaver ar ger "pesk" en dro-lavar, evel-just!

Pourrez-vous retrouver dans cette phrase une expression à base de poisson, mais qui n'est pas dans l'article de *Gerioù ha troioù-lavar*, p. 19? Il vous suffit de replacer chaque lettre dans une des trois lignes du dessous, sans toutefois changer de colonne... Un indice? On y trouve le mot « pesk », bien sûr!



A	A		F		E	A	D			K		N			A				
D	O		L	A	G	N	N	E	U	N	-	P	E	S	K		A	E	
H	R	U	R	E	U	N	T	I	U	R	E	S	E	S	K	L	Z	O	R
A	R		F	E	U	N	T	E	U	N	-	S	E		A		Z	O	
D	O	U	R		E	N	N	I		K	E	N		S	K	L	A	E	R
H	A		L	A	G	A	D		U	R		P	E	S	K				

Kroashent ar gerioù

Klaskit ar peder lizherenn a vank evit sevel pevar ger, liammet ouzh ar peder frazenn da-heul.

1. Ur stumm berr d'ar verb anavezout (p. 16).
2. Kementad pe niver bras a-walc'h (p. 15).
3. Sklaer eo evel lagad ur pesk (p. 12).
4. Oberennoù an den-se a c'hello bezañ gwelet e chapelioù bro Pondi (p. 13).

Cherchez les quatre lettres qui manquent pour former quatre mots correspondants aux quatre définitions.

			3	4		
			S	A		
			P	R		
2	K	A	L	Z	I	K
1	A	N	A	O	U	T
			N	U		
			N	R		